

FRAZENNOU DA ZIFAZIAÑ

1 Emañ Breizh en arvar da vervel. N'eo ket dre berzh oberoù pe zrougoberoù hon enebourien. Met dre fazi an emsaverien o-unan.

2 Unan eus an traoù kentañ bet krouet gantañ a voe ar gelaouenn lennegel *Kened*, diouzhtu goude ar brezel (kelaouenn a gendeuzo gant *Al Liamm* ha *Tir na nOg*)

3 Dister eo ar ger rekis dre ma embanne a-wezhioù traoù na oant ket lennegezh pe ken talvoudus a se.

4 Abred a-walc'h ec'h embanno [Per Denez] gerioù ha troiennoù bet pennaouet e Douarnenez. Diwezhatoc'h, kalz diwezhatoc'h, e kinnigo un dezenn stad diwar-benn an danvez-se.

5 Setu on aet da lakaat va anv evit ar bloavezh kentañ saozneg ha n'on morse bet er c'hentelioù.

6 D'ar mare-se e oan bet anvet da gelenner e Kemper da gentañ, ha goude, o vezañ ma oan studier war ar saozneg e oa ret din mont d'ur vro saozneger.

7 N'em dije morse bet ar plas – daoust deomp bezañ bet mignoned e-pad ur mare. Ar Chaloni n'en deus morse pardonet din bezañ chomet stag ouzh ar skritur "zh" hag an dra-se a oa ur pec'hed marvel !

8 Ha pegoulz e oac'h staget da skrivañ kontadennoù ha barzhonegoù neuze ?
– Abred a-walc'h, kerkent ha m'eus gouezet stagañ un nebeud gerioù an eil war-lerc'h egile on staget da skrivañ.

9 Me am eus soñjet e oa ret sevel "*Ar Vro*" peogwir, d'ar mare-se, oc'h ober gant ar brezhoneg ne veze ket brudet an Emsav...

10 Ne oa ket un tiegezh brezhoneger, met gwelet em eus aze un degouezh evit deskiñ ar yezh evel doare d'en em azasaat d'un endro nevez.

11 Tra ma 'z aen war-raok gant kentelioù OBER, e kavis anv Per Denez ha e teskis e laboure e Skol-veur Roazhon.

12 En em gavet omp an eil gant egile nemet ur wech, e Roazhon, er Skol-veur, e penn kentañ ar bloavezhioù 1980, met un enor hag ur marzh eo bet evidon.

13 N'hon eus morse kavet gant piv e oa ar gwir.

14 Keuz 'm eus n'o deus ket ma c'hammedoù kaset ac'hanon da Vreizh aliesoc'h evit gellout tañva muioc'h a zivizoù chomet re rouez.

15 Eus Autun he dije Fidelma beajet a-hed al Liger betek Naoned evit klask ur vag a gasje anezhi en-dro da Iwerzhon.

16 O tremen er-maez aod Su-Breizh e voe taget Fidelma gant laeron-vor hag e touaras e bro ar Mor-Bihan.

17 Soñjal a ran en deus Per pardonet din bezañ lezet e ginnig a-gostez.

18 Anat din e oa bet tizhet don gant ar mennozh bet silet en ul levr a-zivout an Emsav a seblante tagañ e vroadelouriezh politikel ha liammañ anezhi ouzh ar Vretoned diheñchet-se a oa aet eus tu an dalc'herien alaman e-pad an eil Brezel Bed.

19 Soñjal a rae hiniennoù 'zo e vije lakaet en toull hep barnedigezh un 10 000 Breizhad bennak a-raok fin 1970 ma kendalc'hje tud da vezañ harzet evel ma veze graet tra ken war zigarez e oant emouestlet en ur strollad sevenadurel bennak.

20 Keuz bras am eus bezañ bet divarrek da gemer perzh en obidoù en Iliz Itron-Varia Sant-Melen, e-kichen an Tabor.

21 D'ar sadorn 30 a viz Gouere eo e deskjomp e oa aet Per Denez da Anaon.

22 Lezel a ra ur plas goull ha n'hell bezañ leuniet nemet gant red an amzer a ziverk ar boan hag a ro tu da welout nemet tuoù gwellañ an den.

23 Met dizoleiñ a ris anezhañ e gwirionez oc'h erruout e Kuzul Sevenadurel Breizh, pemp bloaz warn-ugent 'zo.

24 Gouzout a ouzomp holl e garantez evit ar brezhoneg, un teñzor a rae e seizh gwellañ evit treuzkas.

25 1962. Ur varzhoneg skrivet ganti [Añjela Duval] a vez embannet evit ar wech kentañ er gelaouenn *Ar Bed Keltiek*.

26 Daou zigarez evidon da vont eno neuze.

27 N'em bije ket soñjet kaout un iliz ken bras ha se.

28 N'eus skinwel ebet er gegin (hiziv an deiz e vez kavet unan e kement pezh un ti, estreget er privezioù...)

29 Sikour hon eus bet gant ar gevredigezh "Mignoned Añjela" evit kregiñ rak arabat 'oa gortoz evit ma vefe prest an delwenn e-ser lidañ 30 bloaz he marv.

30 Kroget 'vo an devezh-se da 10e 30 gant un tamm prezegenn.

31 Ur wezenn kant vloaz d'an nebeutañ ken bras hag e vezer bamet o sellet outi.

32 Amañ emañ c'hoazh an ti, ar vein, o klevet ouzh rummadoù all.

33 Ha setu ni, un nebeud metradoù pelloc'h, o tizoloiñ Anjela hag he c'hizeller, Roland.

34 En ur gomz gantañ e teskomp eo genidik eus Loudia.

35 Sur he deus an oberenn graet berzh.

36 Dilennet eo bet e-pad ur pennad evel dileuriad an "*administrateurs civils*" a-berzh ur sindikad ennañ nemet izili ar stroll-se pa oan me unan eus dileuridi ar CFDT.

37 E mod-se e c'hello muioc'h a lennerien dizoloñ un oberenn gant Paol Feval, ha deskiñ penaos e oa anezhañ ur Breizhad a galon.

38 Alese an doujañs divoutin-se evit an deskadurezh hag al levrioù, kredapl.

39 Tennañ splet a raio Herve Burel eus e zeskamant a-hed e vuhez.

40 Met dreist-holl en deus maget un tamm fiziañ ennañ e-unan moarvat, a gemero harp warni a-benn sevel daou gaier e zornskrid, 530 pajenn enno, bet echuet e 1905.

41 Ur skrid fromus ha frealzus eo o lakaat splann war-wel kizidigezh kalon ar skrivagner hag e zoujañs d'e nesañ.

42 Evit ar pezh a sell eus ar priz :

43 Div hini gozh zo oc'h ober ur pennad flapat dindan an amzer e-kreiz miz Mae.

44 Ken kozh on zoken ma n'anavezan ket ma oad.

45 Met souezhet on ganit evelkent pa n'anavezez ket da oad...

46 D'an ampoent-se, rik-ha-rik, e kavas d'an den e oa deuet kreñvoc'h an avel un disterdra ha, yen dezhañ, ez eas en e roud.

47 Ar C'hemperad Reun Madeg eo bet divoutin e blanedenn :

48 Klasket em eus, koulskoude, chom an tostañ ma oa tu d'an Istor.

49 Emañ ar goañv kriz o ren war ar vro, gant e riell, e c'hlaveier hag e zervezhiennoù latarek.

50 Daoust m'eo savet an heol, evelato ez eus un tamm mogidell a-zioc'h ar gêr a Gemper, morgousket c'hoazh, dindan an toennoù goloet gant mein glas.

51 barrikadennoù gwin Bourdel a zo tolpet war ar c'hae, dindan evezh daou vartolod a glask en em dommañ, gwellañ ma c'hellont, dirak un tantad dister.

52 Un den a ya, gronnet en e vantell ha prim e gerzhed, e milendall ar ruioù kammigellek, war-zu presbital ar barrez, en tu all d'ar blasenn a zo a-drek iliz Sant Vaze.

53 ur sioulder don a ren war ar gêr, didud eo ar ruioù, ha n'eus nemet kerzhed an den o trubuilhañ an didrouz.

54 Ar mestr-skol paour-se a zo Alan Madeg e anv. Un anv boutin e Breizh-Izel, un anv brezhonek rik.

55 En XVIIIvet kantved, gant an niver bras a grouadurion o vervel kerkent ha devezhioù kentañ o buhez, ne c'hortozer ket kent badeziñ anezho.

56 Met un dlead eo bevañ ar grouadurion-se ivez...

57 bigi pesketa o tegas pesked o stankennoù lufus, listri-kenwerzh o kargañ hag o tiskargañ bouedoù ha marc'hadourezh a bep seurt.

58 Pa vez skuizh e dreid, Reun a ya da gaout ar vartoloded, rak netra ne blij dezhañ evel kaoz uhel ha rust ar baotred taer-se...

59 Un anv bennak en deus bet gwechall, evel an holl, met den ne oar mui anezhañ, ha n'on ket sur en dije, e-unan, dalc'het soñj eus e anv-badez.

60 Da lavarout ar wirionez, ar *Pondi-se*, mard eo bet ur c'haer a zen p'edo e barr e nerzh, a zo spontus da welet bremañ...

61 Bevañ a ra e-unan penn en ur c'hozh c'hrignol, un neizh touseg bennak, kostez ru Kereon, hag e blijadur bemdeziek a zo mont da vale war ar c'hae ha kontañ, e-pad an deiz doue, da neb en deus divskouarn da glevet, doareoù e vuhez e Pondichéry...

62 Rak, gouez da b-Pondi – ha n'eus, e gwirionez, abeg ebet da ziskrediñ dioutañ – an Indez a zo ur vro hep par !

63 Ober un ofiser a vor gantañ a zo soñj e gerent avat.

64 Bras eo d'e oad, ha peogwir e fell dezhañ mont da vartolod, koulz eo dezhañ prenañ skiant, diouzhtu, seul abretoc'h, seul welloc'h. Goude-se, Reun en em geitañ.

65 Gouzout a raio difenn e gilhoù. Perak ne rafe ket ivez ? Evel-se emañ kont gant an holl ! Ha gant an ambarkamant-se, yantao, Reun a zesko ar vicher !

66 Hag un endervezh kaer a viz Here m'emañ o tremen hebioù d'an tavarnioù evit mont da bourmen e galite war ar porzh, diouzh e voaz, setu ma vez sachet e evezh gant un trouz digustum :

67 met ivez seurt fichenoù aes da implijout, un doare sklaer da renkañ an traoù dre dodenn ha titouroù na gaver ket e lec'h all pe ket ken aes da dizhout.

68 Ne skriver ket ken testennoù politikel e giz-se.

69 Lenn a raer er pennadig dedennus a ginnig Paul Lafargue en dije Keynes tapet mennozhioù en oberenn-se evit dielfennañ enkadenn 1929 hag an dreistproduadur.

70 Kavout a reer John de Wolfe e Londrez. Goulennet eo bet gantañ gant Richard Kalonleon seveniñ ar garg nevez krouet a "Crown of the Verge".

71 Karget e vez eus an enklask ma tegouezh an traoù e diabarzh un dachenn a zaouzek mil douar a skin en-dro d'al lez.

72 Seblantout a ra an darvoudoù kement a zigarez evit livañ tu pe du eus aozadur ar galloudoù.

73 Kas a ra *Dialogues* levrioù d'Al Liamm. Piv a glemmfe ? Digarez da zizoleiñ skrivagnerien hag oberennoù.

74 Deskiñ a ran p128 e oa bet embannet diskleriadur gall gwirioù mab-den e 1799.

75 Dek vloaz eo Kellig pa vez kaset da di e vamm-gozh.

76 Met difennet eo ober traoù 'zo pa n'emañ ket Mamm-gozh er gêr !

77 Ne vezer ket kustum ouzh an tommder-gor e Breizh, dreist-holl e miz Here ; setu n'eus ket bet kement a dud er bloaz-mañ evit ma oa bet er bloavezhioù kent.

78 Ar pal a oa diskouez d'ar yaouankizoù penaos e saver ur violoñs, ha lakaat anezhe da selaou eus tonioù nevez.

79 Bet eo Daniel Ross da lise Diwan ivez da ginnig e ouiziegezhioù d'ar re yaouank.

80 Berzh o deus Isabelle Diverrez John Molineux graet avat...

81 Evel-just e oa krampouezh lipous da leuniañ kof ha korev gourlaz da derriñ sec'hed.

82 Se zo kaoz, avat, n'o deus ket o far pa vez anv da dreuziñ linenn difenn ur skipailh rugby e-giz m'en skipailh ar re c'hlas komprenet – disadorn tremenet.

83 Ne ya ket re zon gwriziennoù ar sivi evit ma c'hellint stankañ ar c'hanoù danzouar.

85 Er bloaz-mañ o devo an dud tro da welet tri arvest :

86 An trede abadenn a vo kaset da benn gant ar gompagnunezh Arvest, a ziskouezo pegen tost e c'heller bezañ eus e varc'h hag ar pezh a c'heller lakaat anezhañ d'ober.

87 Pet mil a zo etre Pariz ha Montroulez ? – C'hwec'h kant kilometrad, a respontis.

88 Mersi bras deoc'h, Aotrou Medisin, bremañ ma ouzon e tiwallin 'benn ar c'hentañ tro.

89 Skrivañ eo renkañ e vuhez.

90 Anzav a ran bezañ bet dipitet o lenn an oberennig [levr Stéphane Hessel]

91 Ne soñj ket din e vefe merc'hed Gaza dieub da vont d'an aod gwisket gant o bikini pa ouzer n'eus ket tu da vanifestiñ eno nemet enep Israel...

92 'M eus aon bezañ krog da lenn istorioù "*The N° 1 Ladies Detective Agency*" un tamm en dizurzh.

93 Tremenvan he c'harr kozh da Mma Makuti, kenlabourez mma Ramotswe evit stourm ouzh al laerez danvez pried, Violet Sephoto...

94 E seizh gwellañ a ra ar paotrig a-benn bezañ degemeret gant e gamaraded, en aner.

95 Neuze, n'eo ket istor ur paourkaezh paotr nammet splujet en ur gevredigezh kriz ha bouzar.

96 "Loeizañ (anv gwirion Lola) a zo dezhi ur vuhez leun a ... virvilh" a gemenn deomp an embanner.

97 Dre forzh bezañ boutin e teu buhez Loeizañ da vezañ divlaz pe zivlasoc'h.

98 Ha koulskoude, perzhioù mat zo d'al levr lijer-mañ, par da vuhez ar re yaouank o

valafenniñ en ur bed dister ha dihegar.

99 Soñjal a ra da Fañchoù, kelenner war ar matematik, bezañ kollet e lunedoù.

100 Ur paotr a feson, Charlez Riwalan, ur gwir hini. Eus ur ouenn ha na vez mui gwelet puilh en deiz a hiziv.

101 Dav eo lavaret, kalz aesoc'h e vez an traoù abaoe m'en deus Charlez roet alc'hwez e stal-adrenv din.

102 O Charlez, gwir, te 'rofe kentelioù din ? Ha me 'c'hellfe dont e fin ma devezhiad labour ?

103 'Fin, 'oa ket ken sot-se sur a-walc'h, rak pratikoù 'vez dezhañ, ha gwerzh 'vez ivez...

104 Hag erruet e oa Klara. Ganti en doa lakaet an traoù sklaer adal ar penn kentañ :

105 Kompren a rae ivez bremañ e oa bet tuet, hag hi diemouez eus kement-se, da zoujañ da emzalc'h difed ar c'helenner, dres en abeg d'an emglev iskis etrezañ hag e di, ha ne oa ket abalamour da zoujañs un implijadez e-keñver hec'h implijer.

106 Moarvat he doa ar vaouez yaouank merzet e vanke un danvez naetaat bennak dezhi...

107 Rak piv a gonto, bremañ p'eo bet skarzhet ar wazed ha lakaet ardivinkoù diene en o flas ?